

KENTSKRID

LAVAR a gendalc'h da embann disoc'h an imbourc'hioù amkanet da astenn an hanc'herieg. Un darn eus an notennoù zo anezho danevelloù ar c'henlabour en dro da zanveziou ken liesseurt ha skiantoù an alvez hag ar beved, ar c'halvezerezhioù, ar verdeadurezh, al lennegouriezh, an arz, ar c'hramadeg, ar vredoniezh, an istor, al louzawouriezh pe ar vuhez pemdeziek hep ankouaat ar brederouriezh.

Evel en niverennoù kent e lenner e LAVAR 14 lizheroù eskemmet a-zivout darvoudoù ar mare hag an obererion anezho, en o zouez danvez dezrannoù eus amplegadoù istorel ha politikel kelennerzh ar brezhoneg hiziv.

Gouestlet ez eus un naogont pajennad c'hoazh d'ur Gerva prederouriezh, ennañ an termennoù arbennik arveret e LAVAR 13 hag e LAVAR 14. Evel ma 'z eo bet displeget, e talvezo ar Gervaoù-mañ da ziazezañ chanter ur geriadur a'r brederouriezh.

Kammed ha kammed ez araoka diorreadur ar brezhoneg, hep urzh na steuñv evel kement tra a reer er c'horn-mañ eus ar bed : dindan un asvan a unvanded — mouezh ne savfe hiziv enep d'ar brezhoneg — e kenvez dilerc'hioù sonnet an talbennoù kent, morad argilus soverion an *terminal idioms* ha, didrouz, digunvez en ardremez, un dornadig gwastadourion. En devoud ez eus daou dalbenn oberiant. Diouzh un tu, an aozadurioù damantus da gevatalded ar gwirioù, da unded ar bobl ha dre vras da hêrezh an Dispac'h — emellout a reont en aferioù ar yezh dre dennañ an evezh war an dañjer a zo da droc'hañ ar skolidi divyezher diouzh ar skolidi unyezher hag, en dibenn, da hanbarzhañ ur gumuniezh vrezhonek diouzh ar peurrest eus ar Frañsizion. Diouzh an tu all, talbenn ar re ma vount drezo eginou ur sevenadur digent, a gemer da vonveziad ar sevenadennoù kent, en o zouez gwirioù mab den herouezet gant ar Saozon, an Amerikaned hag ar Frañsizion er c'hantvedoù tremenet.

Da welout, e Breizh ez eo an talbenn-mañ diwezhañ hini ar yezh. Hogen ur yezh drezi he unan n' eo netra ha nebeutoc'h eget netra : ur vallozh e chom liested ar yezhoù er bed, un azon a c'hwitadenn evit mab den. Diorren ur yezh zo sammañ un dle e-keñver ar spered, zo serriñ dorioù ouzh an darn vrasañ eus an dud all — hag er c'heñver-se emañ ar gwir gant arzaelerion ar skolioù brezhonek (ganto emañ ar gaou neoazh pa gomzont en anv ur yezh all aet d' ar vrasañ klozerez dorioù er bed). Da emzizleañ e rank diorreerion ar brezhoneg ober anezhañ ul lec'h dibar ma komzo ar spered ul lavar nevezus evit an holl dud war ar blanedenn.

“Digeriñ hon prenester war ar bed.” Diwar an ergeleñn-se roet gant Roparz Hemon tri c'hard kantved 'zo omp loc'het. Kentañ ha mallusañ kammed oa toullañ mogerioù bac'h ar riez c'hall. Hogen an anaoudegezh hep mui ouzh ar pezh a reer er-maez eus ar *communauté nationale* a oa ar vrezhonegerion lod organek anezhi n' he dije kaset da neblec'h. Hiziv, dre ar rouedadoù stlennañ e c'hell an holl gouzout kement a c'hoarvez er bed — pezh na vir ket ouzh pep Frañsez, breizhat pe get, a vezañ molumet organekoc'h eget biskoazh diouzh patromoù buhez unvan. Ur gelennadenn all avat a roe Roparz Hemon : diorren ul lennegezh vrezhonek ; a addezeriomp hiziv : na gemer eus ar pezh a zo nemet an danvez a dalvez da grouiñ ar pezh a vo ; na gilañ davit repu ar sevenadurioù graet, lennegezh pe all, keltiek pe all, met lammat, evel ma lavar ar prederour japanat Tanabe, etrezek “na-vout an dazont”. Alese, pegen diac'hinek bennak e ve, ger (an)stur hon embregadenn : fiziout en avel
“a c'hwezh el lec'h ma kar” pe, e lavar ar preder, asantiñ da bennaenn an angouzout...

Alese liesseurtegezh an testennoù embannet gant *Gwalarn* — o vont lark en tu all d' al lennegezh endeo. Alese lifre Harlikin levrennoù LAVAR ma tremener eus an optik d'an c'hramadeg, eus Freud d' ar poullou blezañ hag eus *Diwan* da Riez Sina... Un unded zo koulskoude d' an holl labourioù-se, evel ma veze unded da embannadurioù *Gwalarn*. N' eo ket unded ar yezh, ac'hoel da gentañ. N' eo ket unded an dud kennebeut all : lod eus kenskriverion LAVAR n' o deus biskoazh kejet, n' o devez ket darempredoù e-maez ar gelaouenn, a zo ken forc'hus o mennozioù ha mennozioù tud forzh pe gevredigezh. An unded etrezo zo unded ar sell : tud *Gwalarn* a veze troet o selloù war-du ar Vreizh nevez a vennent sevel ; merkomp edo selloù Roparz Hemon diwar an derou o tistremen Breizh hag o vukañ d' ar pezh a rae anezhañ “ar wirionez”. Hiziv ez eur aet betek penn an hent en doa boulc'het : ent voniek, e skriver e LAVAR e kement ma troer ar selloù etrezek un na-vout a zo amplegad ar c'hrouiñ. Perak sevel e brezhoneg studiennoù war draoù ar mor, Doue pe

ar surrealouriezh ? Krennoc'h : perak brezhonegañ ? Ar brezhoneg zo lodek en na-vout, n' eo ket peogwir n' en deus staelad kevredigezhel ebet, hogen pa na c'hell ar c'hrouer krouiñ nemet dre gaout da hanterad un hent o sankañ en na-vout. Forzh pe astenn a ve dezhi er bed, ez eo pep yezh vev un hanterad a 'r seurt-se, beziad gwriennet er beziadoù, en dud, nemet o tanaviñ, o koll pep beziadegezh e kement ma 'z eo tra, antra kentoc'h, an dazont. Moarvat, an argoll m' emañ ar brezhoneg en deus dihunet e Roparz Hemon, hag ennomp da heul, hevelep durc'hadur spered etrezek an dazont, an na-vout hag ar c'hrouiñ — arveriadet ar yezhoù sampar, mar lakaer er-maez ar grouerion, ne vezont ket prederiet nemeur gant na-vout an dazont, n' en buhezont ket evel amplegad ar c'hrouiñ na war un dro evel gourdrour padek o plavañ war o yezh.

Spisoc'h e teu ster an dibab diazez a zo hini *Preder* ha LAVAR. Bezañ un embannadur a brederouriezh ne vez nepred un dibab platonek. Ne reomp ket prederouriezh evit ar brederouriezh na kennebeut dre abegoù a remzad, met evit kompren ar pezh a reomp. Ouzhpenn pergont vloaz 'zo, pa zegouezhas diazezerion *Preder* e-touez labourerion ar yezh, e rannent ganto o feiz hag o entan. War un dro e verzhent e chome drespont an aters a save enno daoust da bep tra : perak ? Perak hevelep feiz hag entan ? Perak brezhonegañ ? Mar lezer a-gostez ar sigurioù kamm, ne oa den evit reiñ ar perak, ne oa den armet ent prederel evit teurel sklerijenn vastus war ster an embregadenn ma engouestle an emsaverion o buhez. A-hed ar bloavezhioù hon eus tastornet war glask d' hon luskedoù hag un aridennad respontoù hon eus kredet reiñ, pep hini oc'h eilsammañ an hini diagent en ur stern hollveziadekoc'h. Lenner ar 4 000 pajennad a ya d' ober ar gelaouenn *Emsav* a c'hell heuliañ an arroud turmudusañ ha krennusañ eus an hollc'hadenn. Houmañ ned eo ket echu — hag he fin ne ve ket azon he c'hwitadenn ? — un devoud a bouez avat a c'hoarvez : emgavout a ra a-gendon gant hollc'hadennoù all er bed. War an tu all d' ar voull Douar, prederourion gempred engwezhiet en avantur o bro zo degouezhet gant disoc'hoù a zo hon re ken kar dezho ma c'hellomp o dezgeriañ dre an hevelep termenou. An darvoud a ro he sonusted d' al levrenn-mañ.

Pergont dre gant eus pajennoù lavar 14 zo dindan studiennoù a brederouriezh. Tro ha tro e pleder gant devezourion Europa (Hegel, Husserl, Heidegger, Kearney) ha gant prederourion japanat an 20t kantved (Nishida, Tanabe). Ar re-mañ, hogos dianav en Europa evito da vezañ loc'het diwar meizadoù ar preder alaman, a zigor dirazomp dremmwelioù a c'hoanag pell bras diouzh an hentoù dall ma chag speredegzh Kornog. Mouezhioù int o tregerniñ dreist dismantrou un impalaerouriezh nad eo ket

estren dimp. Nes emaint, ur souezh, d' ar mouezhioù a sav a-vesk an tousmac'h kempred, ez eo yaouankiz nevez ar brezhoneg unan anezho etre kalz re all.

Guy ÉTIENNE